

5 a viz Genver 2024

Dihuniñ a ra goustadik evel pa vefe bet ur wagennig e-kreiz al lanv, hejet-dihejet dousik evel ur c'hrouadur war barlenn e vamm.

E pelec'h emeon, a soñj-hi diouzhtu oc'h en em rentañ kont n'emañ ket dirazi ar skritell vras gant tresadennoù laboused ar vro he doa ispillhet bloavezhioù zo ouzh moger he c'hambr.

Enk eo ar gambr, damsklêrijennet gant postoù gouloù ar parkva. Sur n'eo ket ar gambr vras ma kousk enni abaoe un ugent vloaz bennak en he zi kozh e bourk Lannurvan.

Peurziabafet n'eo ket, marteze ? Chomet kilhet 'barzh un hunvre n'eo ket teuzet c'hoazh ? Goustadik e teuz bruzunenn ziwezhañ he nec'hamant. Ha hi da gousket adarre, ken didrabas ha tra en he gwele blot.

Ur vaouez yaouank a zeu tre, ganti ur flotantenn wenn, tamm trouz ebet gant he chaosonioù labour.

— Demat, Itron. Penaos emañ an traoù ganeoc'h hiriv ? a c'houlenn, sklintin he mouezh ha degemerus he mousc'hoarzh.

— Evel gant unan o paouez diabafñ, sur ! En ospital emeon, a gredan. Un tamm soñj am eus he deus riklet va oto war bord an hent, dec'h da noz.

— Dec'h da noz ne oa ket, a respont ar vaouez yaouank. Eizhtez zo a lavarfen kentoc'h.

— Kement-se ? E miz Genver emaomp dija !

— Gwir, hiriv emañ ar bemp.

— Neuze, ur sapre gwallzarvoud 'm eus bet, evit doare.

— N'ouzon ket resis. Goulenn a reoc'h digant ho mignonez, kentoc'h. Deuet eo alies-tre da welet ac'hanoc'h azalek an devezh kentañ m'oc'h bet degaset amañ.

War-lerc'h bezañ bet galvet ur medisin da welet eo deuet Mona enni hec'h-unan, laosket e vez ar glañvourez e peoc'h. N'eo ket savet an heol c'hoazh d'an eur ma tegaser he dijuniñ dezhi. C'hwezh ar c'hafe tomm a ra vad dezhi, kerkent ha pozet ar volenn war an daolig ruilh. Hanter azezet en he gwele e sell Mona dre ar prenestr. N'eus nemet ur parkva bras terduet da welet, nebeut a otoioù warnañ. Kemer a ra un tamm bara. Mailhuret eo bet he brec'h kleiz eus an dorn betek an ilin, ha tammoù sparadra a zo bet peget ivez war bizied he dorn dehoù. N'he deus ket poan. Met pegen diaes dezhi lakaat amann war un tamm bara ha tennañ golo ur podadig yaourt.

Dont a ra a-benn koulskoude. Naon du he deus ha ne chom bruzunenn ebet war an daolig. En he gourvez en em laka bremañ, evel ur roñflez bet debret ganti Meudig hag e c'hwec'h breur. Perak on ken marnaoniet, emezi etre he c'hroc'hen hag he hiviz. Maget on bet pa oan er c'homa, 'toare, peotramant ne vefen ken chomet ken kuilh ha ma 'z on c'hoazh. Domaj eo, en ur mod ! Un doare diboan da dreutaat e vefe bet, e-pad un hir a gousk !

Teir eur goude lein eo, un eur dereat eo evit mont da welet ur glañvourez graet ganti ur c'houisk kreisteiz hag a zo o c'hortoz he merenn vihan. Digoret dor ar gambr, e teu ur vaouez da vriata Mona (ar pezh n'eo ket eus an aesañ, gourvezet ma 'z eo war he gwele).

— Nag a aon am eus bet, emezi. Na pegen mantret on bet o klevet e oas bet gloazet !

— Ha penaos 'peus gouezet ?

— N'ouzon ket resis ! Marteze ez poa skrivet va anv war un tamm paper en da zoug-paperioù hag eo bet kavet gant ar bomperien pe an archerien. Pe abalamour ne oa ket bet dic'hastet da bellgomzer o doa galvet an dud az poa enrollet o niverennoù ennañ. Chañs am eus bet ma 'z peus choazet implij va anv-familh e-lec'h va anv-badez.

Dirollañ a ra an div vaouez da c'hoarzhin evel div grennardez disoursi.

— Anat eo ! Ma vefe bet ret d'an archerien mont betek al lizherenn S, pe W hag Y evel va mibien William ha Youenn nag a dud o defe direnket.

— Deredet on d'ar c'haloup, goude va labour. Ne oa ket bet lavaret din e oas er c'homa, ha me chomet evel ur peul e-kichen da wele. Pa 'm boa gwelet da zremm ken gwenn, da zaoulagad serr hag an tuellennoù ouzhit e oa bet tost din semplañ. Gwasket 'oa va c'halon, tomm-tre e oa deuet din er gambr-ospital-mañ, dirak korf difiñv va mignonez tostañ.

Stardañ a ra dorn Mona etre he daouarn, a gren gant ar from.

— Me an hini eo am eus kaset keloù da'z taou vab. Prometet em eus reiñ dezho da c'houzout penaos e vije an traoù. Bremañ eo dit gervel anezho. Da Nedeleg ez peus bet ar gwallzarvoud, a gendalc'h Suzon. Frigaset da oto ouzh ur c'hleuz, war an hent etre Landerne ha Plougastell. Re vuan e oas o vont, moarvat. Riklet ar c'harr war geot gleb bord an hent, ha pffffff, aet da skeiñ a-dizh ouzh ar c'hleuz meinet. Chañs vras 'peus bet, 'c'hellez da grediñ. Kaletoc'h da benn eget mein-greun ar vro.

Ha c'hoarzh adarre.

— N'eo ket deuet Modest da'z kwelet ? Me 'soñje din

e vefen en em gavet gantañ ur wech pe ziv en da gambr pe en trepas.

— N'ouzon ket. O paouez echuiñ c'hoari Koantennig Koad ar C'housk emañ, 'welez ! Ha priñs ebet n'en deus poket din, evit doare !

Huanadiñ a ra, hag ur seurt trubuilh a wel Suzon e daoulagad he mignonez, evel latar o plavañ war ar mor gris.

— Deuet eo er penn-kentañ, moarvat, ha gortozet kaout keloù digant tud an ospital da c'houde, eme Suzon. Soñj 'ta : ur sizhunvezh hanter out chomet e Kêrhun. Mall zo warnout bremañ bezañ er gêr en-dro, sur !

— Ba, a respont Mona. Ne raio ket a zrouk din chom un devezh all pe zaou, bremañ pa 'z on dihun. Amañ e vez graet war va zro, ne 'm eus netra da ober estreget dis-kuizhañ. Er gêr em bo da fardañ boued, ha da zistaliañ. War an tu all, mall zo warnon pellaat eus ar mor a dud gwisket e gwenn a zeu hag a ya, goulennoù ganto bepred. Trouz kammedoù a vez klevet diouzh an noz ivez, daoust dezho gwiskañ botoù ispisial, sañset da vezañ didrouz.

— Normal eo, o labour a reont. Ret eo dezho gwiriañ n'eus netra a-dreuz en da empenn. Arabat dezho kas d'ar gêr ur plac'h evelhout hag a vev hec'h-unan hep bezañ sur eo gouest d'en em zibab.

— Kompren a ran, a c'hrozmol Mona difraeshoc'h-difraeshañ he mouezh. Un draig all a fell din goulenn diganit. Ganit emañ alc'hwez va studio, kae di ha degas un nebeud dilhad din. Divalav e kavan ar c'hrez a zo ganin.

— Mont a rin fenoz. Poent din kuitaat bremañ. Amzer a vo dit ober ur c'houskig all a-raok koan. Kalon vat, Mona gaezh.

Ha hi er-maez. Gwir eo, skuizh eo Mona gant o frantad marvailhat. Ezhomm distanañ un tamm he deus. Ha furchal e don he memor !

Miz Du 2023

War marc'had Sant-Varzhin edo Mona gant Suzon, evel m'int boas bep Sadorn vintin, hervez an amzer. Un devezh brav a viz Du a zo anezhi, koumoulek an oabl ha yen an amzer. Gwisket he deus he mantell-c'hloan zu hag he skerb melen, a-benn ma teufe ur barrad avel didruez.

— Met perak an diaoul ez peus laosket an istrogell a werzher bitrakoù null reiñ da grediñ ez poa ezhomm deus ar re-se ? a c'hrozmol Suzon. Aya, sklaer eo ! Gant e zaoulagad du-pod hag e vousec'hoarzh ledan e teufe a-benn da werzhañ ul lodenn deus al loar da forzh piv ! Paourkaezh Mona ! Re gozh out 'lato, evit bezañ touellet gant ardoù ur paotr yaouankoc'h eget da vab henañ ha ne glask nemet an tu d'en em zizober eus kartoñsadoù kozh traoù !

Ur c'hruz d'he skoaz gant Mona p'emañ o tigeriñ koufr he c'harr-tan glas a-benn fornian ennañ an daou gasedad, berr un tamm hec'h alan hag he divrec'h o krenañ diwar-goust ar pouez.

— Ale, deomp bremañ da evañ ur banne, a ginnig da Suzon, evit reiñ peoc'h d'he zeod lemm. Hag ur gram-pouezhenn gant ar c'hafe, evel kustum.

Setu an div flaperez o vont d'ar c'hoc'hu. Eno e vez

ur c'houblad war an oad o fardañ hag o werzhañ kram-pouezh bep Sadorn vintin da vegoù lipous deuet un tamm skuizh gant o monedone en alezioù ar marc'had. Da bep hini he flijadur. Pa 'z eont asambles d'ar marc'had e plij kalz da Vona chom a-sav dirak taoliadoù levrioù. Follennata anezho a ra pa ne sav ket re c'hwezh al loued eus ar pajennoù melenaet ha kras. A bep seurt a vez kavet. A bep seurt a bren Mona. Nevez zo he deus kavet ur studiadenñ skrivet gant he c'helenner prederouriezh a-wechall, d'ar mare ma oa liseadez e Kemper. Ernest Renan hag ar feiz, setu danvez ar pikol levr-se, keinet e lêr, bet paeet e embann gant an aozer e-unan. Ur mous-c'hoarzh a vleugn war he muzelloù o soñjal er beleg kozh, moal ha kof dezhañ a roe kentelioù borodus ken-ha-ken. Penaos e veze lesanvet gant liseadezed didruez ar c'hlas Termen A ? Aya ! Flacus ! Diwar al latin e teue al lesanv divalav-mañ, hag a glote mat gant e gorf distreset gant n'ouzon ket peseurt pec'hed. Ar boued ? Ar boeson ? Ar paourkaezh den, ken enoeüs hag a ginnige da verc'hed yaouank mont d'e welet evit fraesaat tra pe dra a-douez e gentelioù borodus !

Hiriv n'he deus Suzon kavet pezh dilhad nevez ebet da renkañ en hec'h armelioù leun-kouch dija, ha n'he deus prenet netra zoken diwar stal ar varc'hadourez kozh lesanvet ganto “deuxfrancssixsous” peogwir e werzh “tri euro an tamm, pemp euro an daou”. Honnezh koulskoude a oar mat disachañ selloù he c'hliantez feal war ur jiletenn hag a vefe er goañv ken tomm hag ur vantell feur, pe ur saro a vo brav gant al lostenn fleuriet he doa prenet ar sizhun a-raok. Ha gwelet he deus Suzon pegen brav eo ar sae liesliv-mañ, a vanko dezhi evit mont da vakañsiñ da Vro-Spagn en nevezamzer ?

Perak em eus prenet ar c'hartoñsad levrioù-mañ ? Netra da welet gant lagad du ar paotr, a soñj Mona. Desachet eo bet va evezh gant golo ul levr hag a oa war-c'horre. Ul levr gant Salim Hatubou, ur skrivagner a vro Komor. Ur skouerenn a oa bet profet din pell zo gant ur studierez eus ar vro-hont, deuet da vezañ skolaerez eno. Graet em boa anaoudegezh ganti da vare ur staj hañv e Marsilha. Disoñjet ganin hec'h anv ha kollet al levr. Kerkent ha gwelet ur skouerenn war ur stal er marc'had e oa savet debron ennon d'e gaout adarre. En em glevet on gant ar gwerzher, n'en deus netra da welet gant Komor, na gant ar stal kennebeut. Roet un tamm arc'hant dezhañ gant perc'henn ar varc'hadourezh evit klask gwerzhañ an traouajoù-mañ, ha setu tout. Hag eñ kinnig din kemer ar c'hartoñsad en e bezh, kuit da deurel pep tra e poubellenn ar marc'had pa vo erru eur an distlabezañ. Er mod-se 'vez graet alies gant tud hag a glask gounit un tamm arc'hant war-lerc'h riñsañ tiez tud varv.

— Ale, Madam ! en doa lavaret paotr e vousec'hoarzh joaus. Evit priz ul levr e roan an daou gasedad deoc'h. Paper d'ober tan, m'ho peus un oaled ! Kemer, kemer !

Hag an div vaouez da c'hoarzhin, hag o treveziñ ar paotr yaouank, pep a vanne kafe dirazo.

11 a viz Ebrel 2023

Un nebeud devezhioù a-raok vakañsoù an nevezamzer ez eus erruet ur pakad (petra ri ! unan bet skolaerez he buhez-pad a zalc'h lusk ar bloavezh-skol betek fin he

buhez. Lavaret a ra c'hoazh “vakañsoù” an Nedeleg, re Bask, pe vakañsoù bras, ha fin ar bloavezh eviti n'eo ket gouel Sant Jelvestr, met devezh kentañ miz Gouere). E miz Ebrel, paotr al lizhiri ti-post Daoulaz a zegas dezhi ur pakad, bras rezonapl. Re ziwvezhat evit ma vefe ur prof Nedeleg, re abred evit he deiz-ha-bloaz. Ne bren Mona netra dre ar rouedad gant aon e vefe laeret he c'hodoù bank diganti gant unan bennak hag a vefe barrek-tre war an doareoù tennañ an arc'hant espernet gant paourkaezh tud ken diouiziekl ha hi war burzhudoù an deknologiezh ha fallagriezh ar c'hwip-laeron. Hag aet da goll ar boazamant he doa da gas traoù d'he bugale ha bugale-vihan estreget ur chekenn pe ziv bep bloaz. Urzhiañ a reont dre internet bokedoù da gas dezhi da vare Gouel ar Mammoù, ha mat pell zo !

Setu un nevezenti eo dezhi resev ur pakad a-greiz-tout. Lakaat a ra anezhañ war taol ar gegin ha mont da gerc'hat ur gontell vegek e teufe a-benn ganti da droc'hañ ar gwiskadoù skotch tev emañ ar voest hanter c'holoet ganto. Daoust hag e kavo ur re votoù e-barzh, evel ma 'z eo skrivet war an dikedenn ? Gant aked e tigor. En diabarzh, da gentañ-tout, e spurmant ur golo-lizher, unan skeudennet warnañ frouezh ha bleunioù ur vro domm : litchi, mangez, gwez flimin. Diouzhtu e kompren : Sylvie, an hini eo he deus graet ar gasadenn dic'hortoz-mañ. Ur Reunionadez eo honnezh, hag a zo aet en-dro d'hec'h enezenn c'henidik pa oa bet kinniget dezhi echuiñ he buhez-labour e skol bublik kêriadenn Sant-Jozef, e su an enezenn. Evit lavaret gwir, diaes e veze dezhi padout gant amzer fall Penn-ar-Bed, pa ra glav dizehan e-pad devezhioù ha devezhioù, ha pa zeu ar mor hag an oabl da vezañ memes liv, liv ar plom hag an dristidigezh.

Kustum eo an div vignonez da gaout darempred dre skrid. Lizhiri ha posteloù ivez, evel-just, kalz buanoc'h pa vez ret d'ur gemennadenn ober tro ar bed. Plijout a ra dezho kas ha resev lizhiri gwir, war follennoù paper pe kartennoù-post peget warno timbroù brav. Bet eo Mona div wech d'ar Reunion, ha bamet eo bet gant livioù ha frondoù an enezenn.

— Deus 'ta, a ginnig Sylvie alies dezhi. Amañ 'z eus tiez da werzhañ e pep lec'h. Unan a c' hellfes kaout hervez da c'hoant.

Met etre daou e chom Mona. Diaes e kav mont kuit da vat eus Lannurvan. Eno emañ gwriennet don, eno emañ an ti m'emañ he zud-kozh o vevañ ennañ, nepell emañ bez he zud hag hini he mab yaouankañ, marvet d'e nav bloaz. Ha mignoned tost he deus ivez, evel Suzon e Brest ha Lina e Kemper.

— Ne 'z peus nemet bevañ hanter amzer du-hont, a lavar Suzon. Me a yelo da'z kwelet, bez disour si !

Evit poent n'he deus Mona kemeret diviz ebet. Gant ma chomo bev he mignoniaj gant Sylvie a zo ar pep pouezusañ eviti.

End-eeun, petra a gont ar flaperez-mañ ? Tev eo al lizher (met bras ar skritur !) Traoùigoù a bep seurt. War he leve emañ abaoe bloaz hanter : ha prenet ganti un tiig e su an enezenn, nepell diouzh al lec'h m'edo o labourat. Graet un afer vat, sur, rak un nebeud labourioù 'vo d'ober, met mall bras 'oa gant ar perc'henn kaout arc'hant fresk, treut a-walc'h ar peuriñ gantañ evit sevel e bemp bugel. Taolenniñ a ra Sylvie he zi muiañ-karet, an dachenn fraost a raio ur brav a jardin anezhi, ar c'hi he deus santimant kaout ivez hag a rofe dezhi tro da vont da bourmen (ha diwallet e vefe an ti, a zo un tamm distro).

Ha flap-flap-flap (dre skrid eo kalz aesoc'h da c'houzañv glabousezh Sylvie eget eurvezhioù dre ar pellgomzer, ur gwir vilin baper eo honnezh, ne chom ket dilabour he zeod, kea !)

« *Ul lochenn a zo e foñs ar jardin, a gendalc'h Sylvie da gontañ dezhi. Ur gabanenn simant, un doenn dol dezhi, damgouezhet en he foull e-korf bloavezhioù ha bloavezhioù. Met implijet 'oa bet, hag e chom e-barzh c'hoazh estajerennadoù traoù on kroget da sellet outo. Echu al labourioù en ti, c'hoant am eus bet da gempenn al lochenn-mañ da sevel un atalier din. Ken pell zo e hunvreon kaout ul lec'h sklêrijennet brav, bras a-walc'h evit ma vefe plas d'ar dafar livañ, a zo kasaus-tre da renkañ el lec'h ma 'z eus un den o vevañ war ar pemdez. Ha setu me krog da sellet pizh ouzh pep tra. Ostilhoù kozh a rankfe bezañ diverglet, pe taolet d'an toull-lastez, bidonioù eoul aet da fall, restajoù podoù livaj, re hir 'vefe al listennad. E-touez tout ar c'hozh-traoù-se em eus kavet daou gartoñsad, chomet e stad vat dre ma oant bet lakaet en ur c'houfr houarn en deus miret outo a vezañ louedet pe preñvedet, hag er mod-se n'eus ket bet re a freuz gant ar glebor (amañ ez eus kalz, tamm pe damm eo heñvel ouzh Breizh-Izel, met kalz tommoc'h, evel-just !). Ul levr keinet, mar plij, am eus kavet ha dornskrivet eo en ur yezh ha n'eo ket va hini. Petra ober gantañ ma ne ouezan ket petra eo ? 'Benn ar fin ez eus deuet ur mennozh dispar din (ken speredek ma 'z on, neketa, Mona gaezh !) : adskrivet em eus ur frazenn a-bezh war google. Ha bet ur respont : brezhoneg eo. Eya, ar benveg burzhdus-mañ a zo berniet ennañ skridoù e forzh peseurt parlant, ha gouest eo da reiñ da c'houzout eus pe hini e teu gerioù pe frazennoù.*

Ha me laouen-tre o vezañ bet ken fin ! Met petra 'rafen gant ur pikol levr e brezhoneg ? Kas da Dielloù an